

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs a-benn

**An aotrou hag ar peizant**

Keraet eo ar butun abalamour d'ar peizant  
An aotrou a vez dalc'h mat klask kaouet an arc'hant

An arc'hant a vez gantan an holl blijadurioù  
Mevel, wetur hag ur chô d'e gas d'an ofisoù

Pa vez erru en iliz hag araok adarre  
Mont a ra e-barzh ar c'heur asamblez gant ar c'hure

Mont a ra e-barzh ar c'heur asamblez gant ar beleg  
Doue 'chom lost an iliz e-mesk ar beizanted

Doue 'chom lost an iliz e-mesk ar beizanted  
Da selaouet o fedenn hag o c'hlemmoù kaled

Da selaouet o fedenn ha memez o c'hlemmoù  
Doue 'ra ket kalz a gas 'vit gwelet an aotrou

An aotrou 'vez saludet laret dezhañ dont d'an ti  
Me ar paour-kaezh peizant a vez laosket 'vel ur c'hi

An aotrou 'vez saludet diwisket gant an tog  
Me ar paour-kaezh peizant 'vez laosket dont war-raok

Pa vez erru mare lein ez a an aotrou er gambr  
Ur fourchettez en e zorn ha loaioù kaer en arc'hant

Me, ar paour-kaezh peizant ya da blasoù al loened  
Choman eno 'pad an deiz gant an naon hag ar sec'hed

M'am bije bet un tamm butun da lakaat ur c'horniad  
Torchenniñ lostoù ar saout ha goulenn pegement

P'am bez lakaet ur c'horniad sachet war ur vogedenn  
Ha neuze 'gav din 'vezan un den evit biken

Setu micher ar peizant 'vit gounit e damm boued  
Oc'h ober war dro e brajoù ha lakaat kalz a ed

Ma m'eus drouklaret netra dre va frajelite  
'C'houlant eskuz gant an dud ha pardon digant Doue